

*Var un ton anoeset.*

**B**RASSA chagrin var ar speret  
A oufe biqen beza,  
Eo caret ha beza caret,  
Ha rancout dispartia :  
An diou galou a vez mantret,  
Hag o diou e tizec'hont ;  
Caer o deus beza separet,  
En em garet a rancout.

Resista oc'h ar garantez  
A zo contr'ol d'an natur,  
Nep ne zalaou qet e mouez

7

A zo ur monstr a dra zur.  
Hi a so certain ar guenta  
Eus a lezennou ar bed :  
Petra dâl sonjal resista ?  
Mestres e vezo bepret.

Ar c'hoajou z'o d'al lapouset,  
D'an dour eo ar rivierou ;  
Ar mor bras a zo d'ar pesqet ;  
Ar firmamant d'an astrou ;  
Va c'halou zo d'ar garantez,  
Evit caret emeus-hi,  
Me zant hac a gleo e mouez,  
Senti a rancân outi.

Nep a garân var an douar  
Am c'har-me ive d'e zro ;  
Biscoas ne meus bet ar glac'har  
D'e guelet ur vech e dro.  
Hon daou e zomp atao contant  
Evel an durzunellet,  
Ha neus qet c'hoas bet en instant  
Na vemp-ni en em garet.

Un destin, var a lavarar,  
A so o regli peb tra ;  
En a ra hirio hor bonneur,  
Varc'hoas hor chagrin vrassa.  
An destin cruel ha barbar  
En deus hon dispartiet ;  
Mes, en despet d'hon oll glac'har,  
Fidel oump atao chomet.

Leusqet en deus, en e arrach,  
E oll vinim da redet,  
Hac e clasq pilat hor c'houraeh  
En deus en guell cimantet.

8

Destin ebet, en assuranc,  
Ne doro hor c'harantez :  
Mont a-rai hor perseveranc  
Qeit a ma zay hor buez.

Lezomp an destin pretantet  
Da uza e oll ardou ;  
Lezomp an arne egaret  
Da ober e c'hoariou :  
O daou e zint qer variant,  
Na oulet fiziout enno ;  
Mes hor c'harantez so constant :  
Netra james n'e zoro.

En em garet en honestis  
Hon eus great a dra sur,  
Ha tremen gyê hor yaouanqis,  
Ha gant calz a blijadur.  
Ral eo bremâ m'en em velomp,  
Abaoue hon disparti ;  
Evel ato en em garomp,  
Mes hep en em frecanti.

Coust a ra da vouir mignonet  
Ober ur seurt disparti ;  
Evit deomp ezeo coustet,  
A ellomp da asuri.  
Mes na gollomp qet a fiziañç  
Ni a en em gavo c'hoas,  
Hac a zisquezo hor c'honstanc  
Partout evel a biscoas.

F I N.